

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAN (24)

Barzhonegoù. Romantoù. Pezhioù-c'hoari. Danevelloù. Sed aze geriennoù, en mesk reoù all, anavezet da envel bravigoù, perlezennoù pe teñzorioù hon lennegezh. Kement barzhoneg, romant, pezh-c'hoari pe danevell zo n'int ket bravigoù avat ! Pell a vezañ ! Ret eo didoueziañ, ret eo dilenn anezhe. Ret eo o lenn hag o blazata, o c'haret ha reiñ lec'h dezhe en hon empennoù digor hag en hon speredoù marnaoniet. Betek o lakaat en kreiz hon c'halonoù. Dimp da vevañ.

Meur a hini a blij dimp, meur a hini a garomp, evit abeg pe abeg. Pep hini en deus e abeg, an abeg gwellañ. Skridoù hag a gas ur gomz digor dimp, hag a zigor ur weledigezh en tu all d'un dremmwel re latarek alies. Skridoù hag a ro dimp da c'hoût petra eo spered ar vro, hon spered, hag a c'hall bezañ kar da speredoù all er bed. Ur weledigezh o vont pell-pell en desped d'hon doan rak an dianav. « An dianav a rog ac'hanon » eme enskrivadur brudet ti ar paotr Tomaz Dobrée (1810-1895) en Naoned...

En touesk skridoù Abeozen zo unan am eus lakaet en ur c'horn tomm em c'halon, pell zo. Ur skrid leun a deneridigezh, a garantez, a hiraezh ivez. Marteze un hiraezh pozitivel mard on aotreet da skrivañ kement ! Tud zo a lavar eo ur skrid evit ar vugale. Ya, sur, ha sur-mat. Met ur skrid hag ac'h a en tu-hont d'ar rummadoù renket brav. Stummet evel un danevell na vije ket bet dinac'het gant ur c'honter en korn meur a oaled. Ha n'eo ket hon Ronan hag en dije lâret ar c'hontrol, hon Ronan bet e embanner !

« Bisousig kazh an tevenn », gant an *incipit*-mañ : « Hag amañ bremañ e stag Eñvorennoù Bisousig Kazh Du an Aistinoù, ganet e kalatrez ispisiri Katarin ar Gall, e nec'h ar Ru Nevez, e Landivizio, hag aet da vevañ e vuhez-kazh da di Mòn Senant ha Saig Porc'hell, e tevenn an Aistinoù, en arvor Ploueskad. »

Bisousig, ar c'hazh du, zo muioc'h evit se, bezañ eo un dudenn lakaet da zen gant Abeozen : emañ o vevañ e vuhez-kazh, gwir eo, met ivez o rannañ ul lodenn vat eus buhez Mon ha Saig, hep ankouaat Bailhenn, ar vuoc'h. Nemet eo eñ an hini a gomz, hag a lavar e soñj, diouzh ar pezh a wel, a glev. Gant sebez, gant fent, gant poell : an tri ger a ra personelezh hon Bisousig !

« Met an dud n'int ket habask eveldomp-ni, kizhier. C'hoant o deus bepred da dapout Pask a-raok Nedeleg hag e tlefent gouzout, peogwir e kred dezho bezañ speredekoc'h egedomp-ni, e teu pep tra d'e boent hag ez eo ret d'ar goañv bezañ kriz evit ma vo un hañvezh tomm hag un eost kaer. » Hag hon Abeozen, evel naturelour akuit ha lemm, en devoa gwelet mat petra oa doareoù ar c'hizhier : « Ur peskig liv-gwer a oa dirazon. Reudet oa gant ar marv ur pennad oa. C'hwesa a ris anezhañ ur pennadig, e dreiñ hag e zistreiñ, hag, a-benn ar fin, e stagis gant ar penn. Atav eo gant ar penn e kroger da zebriñ ar pesked, evel an holl loened a baker. Diskiant e ve ober a-hend-all. Ur wezh m'hoc'h eus klevet eskern ar penn o vruzunañ etre ho javedoù, n'eus mui riskl ebet ez afe kuit ho preizh. » Kuzul mat !

Hag hon Bisousig a oa unan eus an arvor, un Arvoriad gwir, dindan bluenn hon Abeozen : « Un tamm lipous eo ar par gwrac'h, lipousoc'h kalz eget an touilhed a vez foetet din alies gant ar besketaerien chifretez. Anzav a rankan em eus, a-hed ar wezh, kavet gwelloc'h blaz gant ur peskig eget gant ul logodenn. Ha pa vez foetet dirazoc'h, bev-buhezek c'hoazh, ez eo ken plijadurus e lazhañ eget ned eo ober he stal d'ul logodenn. Nemet ar pesked ne wic'hont ket. Mut int, a leverer. Padal, klevet em eus gwrac'hed bras ha pezhioù silioù-mor o roc'hal pa vezont tennet war ar sec'h. »

Hag al lodenn eus an eñvorennoù a blij din ar muiañ, evel deoc'h-c'hwi moarvat, eo abadenn ar gwin-peñse. Ar gwin-peñse, gopr pasianted Arvoriz a-hed ar c'horc'hwezh, bras, bihan, o wallgas al lestroù karget a varrikennadoù gwin ! Ret oa ober buan ha mont hebiou finesa ar valtouterien.

« Hag e tostaas an dud gant listriaj a-bep seurt. Ar barazhioù zoken a oa diskennet en aod da resev gwin e-lec'h dienn. Nemet, e feson, ne zivere ket fonnus a-walc'h ar gwin hag e stagas mouezhioù da glemm. Erru oa an noz ha n'o doa c'hoazh bet berad ebet eus ar gwin.

- Mat ! eme Jampi Gervoa, a zeue ken propik ar galleg gantañ pa veze tommet d'e benn, lakait ar varrikenn war he revr. Me zo o vont d'he didalañ deoc'h hag ez aio buanoc'h an traoù.

Diouzhtu e voe gwintet ar varrikenn ha Jampi en e sav warni o tarc'haouiñ taolioù botoù gant e holl nerzh. Souden e voe klevet ur strakadenn. Tal ar varrikenn a vankas dindanañ hag, a-raok m'en doe bet amzer da ober ul lamm a-gostez war an traezh, ez oa Jampi er gwin betek e zivskoaz. »

Ur vuhez a-stroll. Buhez ur gevredigezh. Taolennet brav gant Abeozen. Bisousig evel tredeog, hanterour an darvoudoù sellet oute gant e zaoulagad kazh. Kazh du, roue an Aistinoù, en tu arvor Ploueskad.

Met an aergelc'h zo o vont da bounnerat buan, ar vuhez zo war eilpennañ kalet rak trouz brezel zo. Bepred ar brezel daonet. C'hoazh hag adarre. N'eo ket ar brezel bras, na oa ket bras nemet un drailh spontus e oa, met an eil hag a vo drastusoc'h c'hoazh : pulluc'hañ, flastrañ... ha leurenniñ an ankounac'h... Lakaat al ludu da haroz, un heug.

Buhez Bisousig taolennet gant hon Abeozen zo hini ur gevredigezh o vont da glozañ, evel ma oa bet unan all klozet en 1918. 1914-1918 a oa ar brezel o klozañ an XIXvet kantved, 1939-1945 a vo namm diziverkus ar c'hantved goude...

« Savet brezel etre an dud. Dalc'hmat e vez meneg ganto a vrezel en un tu bennak. Met en dro-mañ, evit doare, eo kroget tostoc'h ouzhimp. Tennet eo bet bag Lan war an tevenn ha n'emaomp krog nemet e deizioù kentañ miz Gwengolo.

Kuit eo aet ar baotred yaouank hag ar wazed e barr o nerzh ha deut warnomp ur c'hoañvezh kriz ha hir. Tremen am eus graet ar mizioù du o vorediñ en un toullig goudor er bern kolo. Pa gousker e santer nebeutoc'h e reer kof moan.

(...)

Hag un deiz em eus gwelet o tegouezhout war an tevenn ur strollad gwazed, gwisket e gwer-louet, gant heuzoù ponner ouzh o zreid, armoù ouzh o skoaz. Paotred terrupl a oa anezho, melen o blev peurvuiañ. »

Eñvorennoù Bisousig zo evel fotoioù graet d'ur c'houlz resis eus e vuhez dezhañ, evel vignetennoù o sevel un doare peuzeul (puzzle mar kavit gwelloc'h). Dre ret emañ kevredigezh Mab-den warne. Ur gevredigezh kaset ha degaset gant an darvoudoù. Evit bremañ eo aet Bisousig, met sur on e chom e skeud war api ur wrac'h bennak stlapet dezhañ gant ur pesketaer yaouank. Sur on e tiwall bepred al logod a-raok treuziñ an tevenn etre daou di, aet da diez-hañv alies...

Herve Bihan

Levrlennadur

Abeozen, Bisousig kazh an tevenn, Al Liamm, Niverenn 45, Gouhere-Eost 1954, pp. 13-47.

Abeozen, Bisousig kazh an tevenn, Al Liamm Tir Na n-Óg, 1954.

Abeozen, Bisousig kazh an tevenn, tresadennoù gant Tudual Huon, an Here, 1987.

Fañch Elies-Abeozen, Ur brezel diot -Deizlevr gwengolo 1939-mezheven 1940, Preder, Kaier 50, Eost 1963.

Ronan Huon, Ar marvailh poblek hag an danevell a-vremañ, labour skol-veur, Roazhon 2, 1977.